



DANVEZ PROGRAM ISTOR

Evel ma oar an holl anavezout Istor ar vro hag he yezh a zo diazezoù pouezusañ d'an den da virout e identelezh.

Evit ar wech kentañ e KEAV e vo kinniget ur rummad kentelioù war Istor Breizh. Pemp prantad az aio d'ober ar rummad :

- ar Vretoned hag ar Romaned (1añ kantved a-raok JK / 5 vet kantved goude JK dre vras)
- ar Vretoned hag ar Saksoned (5vet kantved - 10vet kantved)
- ar Vretoned hag ar Franked (6vet kantved - 9vet kantved)
- ar Vretoned hag an Normaned (9vet kanted - 12vet kantved).
- ar pezh a zeu war wel a-dreuz an 13vet kantved (ar mor evel liamm etre 2 riblenn mor Breizh, ar perzhioù dibar a zo da lu Breizh, ar relijion...)

- War-lerc'h displegadenn pep prantad e c'hello ar stajidi eskemm ha tabutal war boent-mañ-poent.
- Pleustret e vo war an treiñ en ur labourat war destennoù berr tennet eus skridoù dave hon istor : an DE EXCIDIO BRITANNIAE pe c'hoazh BUHEZ AGRICOLA, da skouer.
- Lakaet e vo buhez er c'hentelioù dre c'hoari rolloù : en ur chom a-sav d'ur mare eus an istor ha goulenn gant an dud labourat dre strolladoù bihan gant ar goulenn "ha c'hwi, petra ho pefe graet aze" pe mont gant un dra a zo diouzh ar c'hiz en istor : ar "what if" (petra a vije c'hoarvezet ma....).

Kinniget e vo ar c'hentelioù gant Visant ar Roue. Labouret en deus evit bodañ kalz a zanvez tennet eus ar c'hronikenoù a gomz eus ar Vretoned etre ar 1añ kantved a-raok JK hag an 12vet kantved (a zo dre vras ar prantad ma oa "brezhonegerien" a rene war ar Vretoned), ur c'horpus bras a-walc'h ma lenner istor unan eus ar pobloù koshañ en Europa a zo bev c'hoazh (ne grog ket hon istor gant ar 6vet kantved goude JK e-giz ma lenner alies el levrioù istor diwar-benn Breizh), n'eus ket kalz a bobloù er mod-se ha pouezus eo d'ar vrezhonegerien gouzout an dra-se ha bezañ lorc'h enno.